

CANTICOU

EVIT

USACH AR MISSIONOU


HAC

AR RETREJOU.

Cantate Domino canticum novum.
*Canit eur c'hantic nevez en henor
 d'ho Toue. -- Psalm 95.*

E MONTROULEZ,
 Eus an Imprimiri Intanvez an Autrou GUILMER.

Miz Ere — 1819.



PEDEN D'AR SPERET SANTEL

ARAUC AR ZARMON.

TON : *Je viens à vous, etc.*

Ho lesen din disq'it, me ho suppli;
An den ep doc'h, Autrou, ne all en ober;
N'euz nemedoc'h capabl d'hon instrui.

N'euz nemedoc'h (bis.)

Capabl da douch ar pec'her. (bis.)

Roït eta un nerz divin bepret
D'an ini deu da brezeq an aviel;
Rentit ivez an oll auditoret

En e zarmon (bis.)

Attantif, Speret-Santel. (bis.)

Ave, Maria.

Santès Mari, refuch ar bec'herrien,
Pedit Jesus, hor Salver hac hor buez,
Da zoumetti hor c'halon d'e lesen,

Evit lacât (bis.)

Ennan tan e garantez. (bis.)



PEDEN D'AR SPERET SANTEL

ARAUC AR C'HATEQ'IS.

Mêmes Ton.

CETU me deut aman, Speret divin,
Da glasq gand joa instruction d'am ene.

Grit din eta compren mad ho toctrin ,
 Evit gallout (bis.)
 E heuill gant fidelite. (bis.)

AR MISSION.

Metmes Ton.

DIGUERI ra an êe azioud ho pen
 Evit scuilla-e c'hraçou en abondanç;
 Profitit 'ta anezo, Christenien,
 Profitit 'ta; (bis.)
 E Doue o pêt fizianç. (bis.)
 Goelet a rit dirac ho taoulagad
 En ilis-man cals beleyen digacet,
 Evit annonç deoc'h ho Toue, ho tad,
 Evit prezeq (bis.)
 E lezen santel meurbet. (bis.)
 Ni ho supli, pec'herrien hor breudeur,
 Na gollit q'et un amzer q'er precius;
 C'hui o pezo, mar q'irit, ar bonheur,
 Er mission, (bis.)
 D'antren e graç gand Jesus. (bis.)
 Amâ ezeus pardon evid an oll :
 Caëra q'elou! q'elou certain dudio!
 En em daultit, gant aon rac e rigol,
 Etre divrec'h (bis.)
 Ho Toue trugarezus. (bis.)
 Pardon a so evit al leoudouet,
 An injustiç, an ourgouil hac an avî;
 Pardon evit bep crim ha bep torfed :
 Misericord (bis.)
 A so evit peb hini. (bis.)
 Paour q'eaz prodiç, goulennit 'ta digor,
 En eur distrei d'ar gueur leun a c'hlac'har;
 Hac ho tad q'er a rei en oc'h enor
 Eur banq'et caër (bis.)
 E, fac an êe, an douar. (bis.)

Lavarit 'ta c'hui, Augustin nevez,
D'ar bed tromplus ha d'e oll follenteziou ;
Adie hirio, adie evit james ;

Ha commancit (bis.)

Da voëla ho pec'hejou. (bis.)

C'hui, plac'h yaouanc, pini oc'h eus heuillet
Ar Vadalen, siouas ! en he dizurzou,
Chenchit ivez evelti, ni ho ped,

Hac ho pezo (bis.)

Eur plaç ebars en evou. (bis.)

O pet fizianç ennomp 'ta Christenien,
Ni pere zo ministret ar guir Doue,
Ho mignonet, brassa, a dra certen ;

Discuzit deomp (bis.)

Oll goulou oc'h ene. (bis.)

O va Doue ! an den hep ho sicour
Ne ell netra : pliget gueneoc'h hor zouten ;
Ebdoc'h nicun ne ell en em recour.

Digassit deomp (bis.)

Dioud an êe ho sclerigen. (bis.)

Er barrès-man, grit eur c'houez d'ho toare,
Goalc'hit, goalc'hit ar galonou-mâ mantret ;
Ho rentit pur ha neat adare !

Grit deomp - ni oll (bis.)

Er barados ho cuelet. (bis.)

CANTIC CANET E GOERED LANDIVISIAU,

DEVEZ PLANTATION AR GROAS,

AR 14 A VIS EUENGOLO 1817.

TON : *Reviens, pécheur, etc.*

AR GOAZED.

O devez caër ! ô momend an eürussa
Devez a c'hraç, ô momend precius !
Doue a bardon hor pec'hejou brassa,
O Providanç, c'hui zo trugarezus !

AR MERCH'ED.

O va Jesus! guir eo eta hor c'harit,
 E tistroit evit james ouzomp,
 E rentit deomp ho carantez infinit :
 Oll assambles ho trugareq'emp.

AR GOAZED.

Bete vremen, evel tud abandonet,
 Ep croas ebet, pa c'houlennet ouzomp :
 O Christenien, ho calvar so distrujet!
 Piou a so caus, en lavarit deomp?

AR MERCH'ED.

E respontemp gand eur vouez leun a glac'har :
 Droug - sperejou gand an ifern carguet
 D'ober brezel d'an evou ha d'an douar,
 Ha d'hor lezel ep religion ebet.

AR GOAZED.

Evidomp - ni ato leun a garantez,
 Doue hirio a deu da bermetti
 E sortifemp leun a laouenediguez
 Dioc'h eur brezel great domp gant tud impi.

AR MERCH'ED.

Ia, breman e c'hallimp oll, Christenien,
 Er vered - man dont d'en em brosterni
 Dirac Jesus, lazet gand e vourevien
 Hae en eur groas laq'eat evidomp - ni.

AR GOAZED.

Ar c'halvar - man oll pelloc'h darempredomp,
 Eur levr q'er caër digoromp alies,
 Var ar menez - man attantif meditomp :
 Cetu aze hent ar silvidiguez.

AR MERCH'ED.

Tadou, mamou, er plag - man c'hui a gavo
 Eur model ral, sourcen a vertuziou;
 Humilite, mar q'irit, c'hui obteno,
 Patiented bemdez en ho poaniou.

AR GOAZED.

D'ho yaouanq'is disq'it ato respeti
 Ar beziou - man hac ar stationou ,
 Repos ho q'erent ne deuit q'et da droubli,
 Peb station a gomz dioud an Autrou.

AR MERCHED.

Deoc'h - u ivez , tud yaouanq , divar ar groas
 Ho Redemptor a brezeq e lezen ,
 Ar burete , ar vodesti a garas ;
 Ho fratiq'it , Doue eo en ordren.

AR GOAZED.

En ho touez un Augustin ma velit ,
 Pe marteze eur Vadalen nevez ,
 Da chench buez an cil eguille pedit
 Ha da renonc a grèn d'ho follentez.

AR MERCHED.

Sellit , sellit oud ar c'hostez - ze digor ,
 Corf ar Salver pen - da - ben gouliet
 A lavar sclear eo d'ar pec'her un tenzor ,
 E pardoner da eur galon mantret.

AR GOAZED HAC AR MERCHED ASSAMBLES.

Feuntun divin , ô andred delicios !
 E peb amzer ennoc'h en em daulin ;
 Goad Jesus a zo eur remed precius ,
 Va ene paour gantan a arrosin.

Ober a reomp hirio amand enorabl
 Evit ar re o devez gand arrach
 Anevezet an oll tourmanchou effroyabl
 Eus ho maro. Doue , pebes outrach !

Hor c'houstianç a lavar deomp - ni ivez :
 Ezomp , siouas ! coupabl en oc'h andret ;
 Pardon , pardon a c'houlennomp a nevez ,
 Ra vezo prest d'omp daëlou accordet.

Aroc q'itad treid ho croas , ô va Zalver !
 Bras ha bian , joaüs e bromettomp
 O servicha , hac ivez oc'h an auter
 Mont d'ho receo , en em roit deomp.

PLANTATION AR GROAS.

TON : *Vive Jésus ! vive sa croix.*

AR groas santel-mâ, Christenien,
 A zisq deomp eo Jesus hor Salver;
 A zigaz sonch d'ar bec'herien
 Eus ho redemption ar myster.
 Meulomp, meulomp a vouez huel
 Jesus Map an Tad-Eternel.

{ *(bis.)*

Hac a zouffrançou, hac a boan
 En deus anduret evidomp-ni!
 Ha couscoude evel un oan,
 Jesus a varvas ep murmuri.

Meulomp . . .

E gorf er jardin Olivet
 A santas eur c'huezen a c'hoaad;
 Eus an ifern ar vinistret
 A deuas ep mez d'e c'hoapaad.

Meulomp . . .

E Jerusalem, q'ear ingrat,
 Eo injuriet e mil feçon :
 Herodes, Caïphas, Pilat
 Er c'hondaon ep sujet na reson.

Meulomp . . .

Var ar c'halvar a vec'h pignet,
 Oc'h eur croas iffam ar Judevien
 A stag Jesus, Salver ar bed;
 Cetu maro ho tad, pec'herrien.

Meulomp . . .

An heaul a guz e sclerigen,
 Ar vein oll a deu d'en em frailla,
 An dud varo a deu souden
 Dre eur miracl da ressuscita.

Meulomp . . .

An elemanchou a ziscus
 Int sansibl da varo an Autrou;
 Mantret int o velet Jesus
 Immolet evit hor pec'hejou.

Meulomp . . .

Disq'it gant an elemanchou
 Douguen caon d'an ini a roas
 Eus e garantez yras mercou
 Deoc'h oll, pec'herrien, var ar groas.

Meulomp . . .

Ne deo q'et possubl, Christenien,
 E ve caletoc'h hor c'halonou
 Eguet tout an natur humen,
 Ha ne gaffe nicun a zaëlou. Meulomp . . .
 Hivisiq'en, ô croas santel!
 Nj voëlo dourec hor pec'hejou,
 Hac en devez-mâ solanel
 Ni bromet pratiq' ar vertuziou. Meulomp . . .

DEVOTION D'AR GROAS.

TON : *Au fond des brûlans abîmes.*

ETAL ar groas, ô Christenien!
 Alies deut da bedi;
 Netra ne vanq en e c'hichen,
 Pa vez calz fizianç enni.
 Songit, songit
 Eo eus ar c'hraçou ar sourcen.
 Ar groas bemdez bizitit.
 Attaq'et gand eur c'hlenvez bras,
 E clasqi't oll medicin;
 Eus a bec'het coupabl, sionas!
 Clasqi't eur sicour divin.
 Sellit, sellit
 A druez eta oc'h ar groas.
 Ar groas bemdez bizitit.
 Eur blanten yaouanq ha tener
 A ve laq'eat er goasq'ed,
 Hoguen e c'harz treid hor Salver
 N'ho pezo nep seurt mörç'hed.
 Clevit, clevit
 Pebez avantach, ô pec'her!
 Ar groas bemdez bizitit.
 P'ho pezo chagrin hac anq'en,
 D'ho Redemptor ho c'hontit
 Ho selaou a reio souden.
 Scoit hac ho pezo digor :
 Redit, redit

Da gaout ar pastor souvereh.
Ar groas bemdez bizitit.

Eur vouez a glevot ep dale,
Mouez a gonsolation :
Perac e clemet evel - se ?
Me soufr ive, va mignon.

Bezit, bezit
Patiant, humbl evel don - me ;
Va c'hroas bemdez bizitit.

Va fen sacr, a spern curunet,
Va c'horf toulllet gand eul lang,
Va zreid ha va daouarn tachet
A barlant oll gand loq'anc.

Disq'it, disq'it.
Beza evel - don resignet.
Va c'hroas bemdez bizitit.

Q'emerit, q'emerit courach,
Poent eo, va buguel, disq'i
E rit d'ho Salver un outrach
En eur zont da vurmuri.

Tavit, tavit
Na vurmurit q'et davantach.
Va c'hroas bemdez bizitit.

Soulaget oe'h eus va c'halon,
O va Salver benniguet !
A brassa consolation
Er C'halvar am euz cavet !

Credit, credit,
Me a lavaro gand rason :
Pec'her, ar groas bizitit.

Bremâ e zan da bublia
Ar faveur din accordet ;
Trist e oan pa hon deut amâ,
Cetu me laouen rentet.

Clasq'it, clasq'it
Eus an tadou an tenerra.
Pec'her, ar groas bizitit.

BENEDICTION AR ZACRAMANT.

TON : *Grâce , grâce , etc.*

CETU, cetu ama Jesus - Christ var an auter,
 En a zo ar vietim evidomp immolet;
 Adoromp, Christenien, oll humblamant hor Zalver,
 Da Jesus canomp 'ta mil meuleudi bepret. (bis.)

Cuzet en hostif sacr dre garantez evidomp,
 Gant joa en deuz choazet, emezan, e zemeuranc
 Etouez ar bec'herien. Jesus eta adoromp:
 Rentomp d'e Vajeste graçou en abondanc. (bis.)

En eur vouez ni lavar : O Redemptor benniget !
 Ia, un deiz tremenet e c'harz treid oc'h anterion,
 A zo preciusoc'h eguet mil deiz tremenet
 Etouez a re a deu da garet ar viçou. (bis.)

Calz muyoc'h a istim hon eus bet a bep amser
 E vit eur plaç izel en ho ty, ô va Autrou !
 Eguet evit unan huel en da dy, pec'her !
 Mir da enoriou faos, ha da faos grandeurion. (bis.)

Humblamant prosternet en ho prezanc, va Doue,
 E c'houlennomp bréma tout ho benediction;
 Ni bromet da viç'en, gand eur guir humilite,
 O caret, va Jesus, e peb occasion. (bis.)

Goude ar Venediction.

Cetu ni recevet eur faveur dioc'h an evou,
 Jesus - Christ, hor Salver, varnomp en deveus scuillet
 Abondanc e c'hraçou. Rentomp eta d'an Autrou
 Hiviziquen, gloar; dign eo eus hon resped. (bis.)

MEMES SUJET.

TON : *Jésus dans ce mystère , etc.*

ER myster-ma va Doue,
 E pini n'ho cüelan,

Ho calloud, ho majeste
 Humblamant a veulan,
 C'hui ra va oll eürusted,
 Ebars en hosti cuzet,
 Dign da veza caret!

Caret!

Er barados dudius, (bis.)

E vimp un deiz eürus, (bis.)

Eürus, eürus.

Plijet gant ho earantez,
 Hirio, e peb amzer,
 Accordi deomp furnez,
 Ha peoc'h, ha douçder.
 C'hui ra va oll eürusted, etc.

Ah! grit compren d'am c'halon,
 Ar priz eus ho eraçou;
 Hac ho penediction
 Roit d'am oll œuvrou.
 C'hui ra va oll eürusted, etc.

Ra blijo d'ho madelez
 Selaou va fedennou :
 Canent guene an Ælez
 Oc'h oll mad-oberou.
 C'hui ra va oll eürusted, etc.

MEMES SUJET.

TON : *Que cette vouëte retentisse, etc.*

PROSTERNET, Doue a garantez,
 Ama dirac oc'h auteriu;
 Testou bepret eus ho madelez,
 Ni gonsacr deoc'h hor c'halonou. (bis.)

Deoc'h - u pini zo var an auter,
 Cuzet en hostif evidomp;
 Recevit anezo, va Zalver,
 Ni ho suppli, digueneomp. (bis.)

Rentit anezo pur, va Jesus,
 Ho rentit dign d'ho servicha;

Roït dezo eur c'hraç precius,
Ho penediction brema. (bis.)

Ni ho trugareca, va Zalver,
Dionz eur faveur evel homâ;
Ni vezo fidel e peb amzer
Hiviziq'en deoc'h e peb tra. (bis.)

Ni heuillo tout gand humilite,
Ho gourc'hemenou pen-da-ben;
Evid gallout en eternite
O guelet, va Mestr souveren. (bis.)

En eê gand ar Zant-hac an Ælez,
Ni rento gloar d'ho Majeste;
Ni gano laouen oll assembles,
Deoc'h meuleudi, ô va Doue. (bis.)

AR ZILVIDIGUEZ.

TON : *Nous n'avons à faire, etc.*

EVIT caret Doue
Hac e servicha (bis.)

Omp deut er bed-mâ;
Evid-se eo grêt hon ene.

Ni vezo eürus,
En eur glasq Jesus. (bis.)

Un dra zo necesser
Epad ar vuez, (bis.)

Hor zilvidiguez,
A dleomp gant courach ober.

Ni vezo, etc.

Hac e teufe an den
Da c'honit ar bed, (bis.)

Barados collet,
En deus collet tout, Christenien.

Ni vezo, etc.

Lezomp an debauchet
En e zebauchou,
Q'emer ar madou,

Avaricius caledet.

Ni vezo, etc.

Inutil eo d'ar bed

Songcal hor gonit;

(bis.)

Ho poan a gollit,

Plijadurezou milliguet.

Ni vezo, etc.

Pratiq ar vertuziou

A ra hor bonheur ;

(bis.)

Ni glasco bep heur

Eus ar vuez - all ar madou.

Ni vezo, etc.

Ni heuillo hor Zalver

Var menez Calvar :

(bis.)

Nan, var an douar

Ne deus quet un tad q'er tener.

Ni vezo, etc.

Jesus a zisco deomp

An humilite;

(bis.)

Oll fidelite

D'hon Redemptor a bromettomp.

Ni vezo, etc.

Eur vuez eternal

Eo ar priz a ro ;

(bis.)

An êe, hor guir vro,

Eo recompanç an tud fidel.

Ni vezo, etc.

Nan, al lagad biscoas

N'en deus quet guelet,

(bis.)

Nac ar scouarn clevet

Un dra q'er caër, dign eus hor choas.

Ni vezo eürus, etc.



AR SEPULTUR.

TON : Ælez an êe deut d'an douar, etc.

DEOMP, Christenien, d'ar sepultur
Da gontempli Mestr an natur,

Laq'eat d'ar mara evidomp;
D'hon Redemptor caon douguomp.

Er sepultur, pell dioud ar bed,
Ha dioud e bompou milliguet,
E caver evid medita
Eur zujed an excellanta.

Er sepultur, e c'hall peb den
Facilamant dont da gompren
Pebes outrach a ra d'an êe
En eur offanci e Zoue.

Er sepultur, corf hor Zalver
Enterret en un roc'h dister,
A lavar sclear d'ar bed - oll
Ep pinigen e zer da goll.

D'ar sepultur deomp alies,
Heuillomp oll exempl ar Verc'hes
Pini en em gave eno
Hep cess, da voëla e varo.

Evid model quemeromp c'hoas
Hirio eur benitantès vras;
Mari-Madalen a velet
O visita Zalver ar bed.

CANTIC EN ENOR D'AR VERC'HES.

TON : *Vierge, en tout tems, etc.*

SANTEL bepret, hac ato guerc'hès,
Mam va Zalver, rouanez an evou;
Mari, credi ri - me ep encrès,
Offr deoc'h, offr deoc'h,
Va c'halon, va veuou.

Me ho choas evit va fatronès
Dirac Jesus, ho map ha va roue;
Va madou, va buez, ha me ivez,
Zo dezan, a zo deoc'h,
Muioc'h eguet dime.

Evit va c'herent hac evidon
Me a bromet beza ato fidel

D'an hommach rentet gant va c'halon,
 Hirio deoc'h, hirio deoc'h,
 Mam dener ha santel.

Va frotegit, ô Mari Guerc'hes;
 Me ho suppli da gaout truez ouzin,
 Bep heur, bep moment euz va buez,
 Dreist peb tra, dreist peb tra,
 En devez ma varvin.

PEDEN D'AR VERC'HES.

TON: *Sainte Vierge, etc.*

GUERC'HES santel, hor zicourit,
 D'ho map hor veuou prezantit :
 Pedit anezan da bardoni
 Hor pec'hejou - ni. (bis.)

Discuzit, ô mam va Doue,
 Dezan daëlou e vugale;
 Pedit anezan da bardoni
 Hor pec'hejou - ni. (bis.)

Grit'ta, en heur eus ar maro
 En e c'hloar m'hor recevo;
 Pedit anezan da bardoni
 Hor pec'hejou - ni. (bis.)

AR VARN GENERAL.

TON: *Dieu va déployer sa puissance.*

CETU deiz ar varn rigolius
 Eru gand e oll zinalou;
 Crenit'ta, pec'herien, crenit'ta, tud malheurus,
 A zo a bell amzer goloët a grimou.
 Cetu, ect.

Deiz ar goler hac ar vengeanceou
 Ar bed a gollo e c'henet;
 Rac en un taul lagad, allas! an elemanchou
 A vezo da viq'en, ep damand abymet.
 Deiz, etc.

An heaul a chomo ep sclerigen,
 Al loar, ar stered a guêzo,
 Hac an êe tro var dro, carguet a devaligen,
 E oll ornanchou gant poan a ziouëro.
 An heaul, etc.

Un tan divorus, eus an douar
 A zevo ar binvidignez,
 Hac e habitanted, ar scritur sacr en lavar,
 A varvo gand ar spont, gand an dristidiguez.
 Un tan, etc.

Ar mor, o santout deiz an Autrou,
 A grauzo ivez estlamus;
 Gand furol e teuio da ravagi ar vroyou
 Pere, gand e drous bras, a dregarno spontus.
 Ar mor, etc.

E creiz an drubuil-man general,
 En êe un drompill a zono;
 Savit, savit eta, rac n'oc'h eus q'en da c'hedal,
 Deut d'ar varn diveza, assemblès tud varo.
 E creiz, etc.

Neuze ar beziou a zigoro
 Evit renta ho freiz sclacet,
 Corfou an dud santel caër ha brilliant a vezo;
 Mæs re an dud impi a vezo vil meurbet.
 Neuze, etc.

Cetu ar bed oll ressuscitet,
 Bras ha bian, paour, pinvidic;
 Rouanez an douar, q'er couls hac ho zujedet,
 A gleyo ho zetanc en deiz terrubl, critic.
 Cetu, etc.

Jesus hon Redemptor benniguet,
 Gand majestez en em brezant;
 Gantan e ma e groas pini a zo caër meurbet,
 Var e lerc'h e veleur un arme triumphant.
 Jesus, etc.

Eul levr a zigor en un instant,
 Al levr eus ar c'houstiançou;
 E pini ar pec'her injust, lubric ha mechant
 A lenn en eur ruzia niver e bec'hejou.
 Eul levr, etc.

Tout e tisculier ar pec'hejou,
 Memes ar c'hrimou mezussa;
 E goëled ar galon, ar barner gand eur goulou,
 A zisquen didruez; rac ne bardon netra.
 Tout, etc.

An dud condaonet gand an Autrou
 Oll da grial forz a gommanc;
 Bruzunit hon esquern, varnomp cuëzit meneziou,
 Hon laçaët e poultr, en desped d'hor zetanc.
 An dud, etc.

An dud destinet dar barados,
 Zo leun a laouenediguez;
 Rei a reont da Jesus, oll en eur vonez, mil bennos,
 Da veza ho zretet gand cals a drugarez.
 An dud, etc.

Deut eo ar moment, red eo brema
 En em zepari evit mad.
 Un eternal adie, q'erent, lavarit eta,
 Buguel, ne veli q'en james, na mam, na tad.
 Deut eo, etc.

Ifern, e me Jesus hon Autrou,
 Preparit ho souffr hac ho tan,
 Taulit an dud daonet en eur mor a dourmanchou,
 Un Doue offancet, vengit, vengit, Satan.
 Ifern, etc.

Ha c'hui, barados delicios,
 Gand joa digorit ho toryou;
 Va zent diguemerit, rouantelez dudius,
 Evit ma canint din bepret meuleudiou.
 Ha c'hui, etc.

Dindan an treid neuze an ifern
 A ziscus e oll abymou;
 An dud vechant a bed ho Redemptor d'ho espern;
 Mæs dija int cuëzet en eur mor a boaniou,
 Dindan, etc.

Jesus, gand ar Zent hac an AËles
 A bign triumphant en evou;
 Eur bonheur a gommanç ha ne finisso james,
 E palès an Dreindet, bro ar guir deliçou.
 Jesus, etc.

Hirio disq'ennomp oll a speret
 E punç an ifern, Christenien;
 Songeomp bemdez en tan a zo ennan alumet;
 D'en em zantifia n'euz q'et guëloc'h moyen.
 Hirio, etc.

ADIE AR PEC'HER D'AR GRAOUADURIEN.

TON: *Triste raison*, etc.

ADIE, eta, oll blijadurezou ar bed,
 Me renonç deoc'h brema evit iamæs;
 Va renta eürus biscoas noc'h eus gallet,
 Me renonç deoc'h gand laonenediguez.

Cavet e meus an Doue-ze q'en chalmant,
 An Doue-ze a ell va c'hontanti;
 En a zizec'ho va daëlou abundant,
 En a ouëzo certain va c'honsoli.

Ne poa netra da veza comparachet
 D'ar guënet-ze unic, celestiel;
 Impossubl edo dide, bed milliguet,
 Procuri din eur bonheur eternal.

O va zad q'er, ar guella eus an tadou,
 O va Jesus, fleuren ar vignonët,
 Ne fell din q'en gortos nemet ho craçou;
 Me voar petra oc'h eus din promettet.

Te ras dime promessaou caër meurbet,
 Mignon traitour, bed hypocrit, trompler,
 Brema me zant petra e poa din roët:
 Petra? nemed da viçou, faosouier.

O va Zalver, objet q'er va c'harantez!
 Dre ho touçder oc'h eus va gonezet;

Evidoc'h e cresq va zenerediguez,
Rac dioud ar viç c'hui oc'h eus va zennet.

Teir guech eürus eo zur ho guir servicher,
Beza en deus ar blijadur douça;

Pebez bonheur caret un tad q'er tener!
Hon Doue eo, hae hor mignon brassa.

Gloar deoc'h, Jesus, c'hui a zo hon esperanç;
Ni gonsacr deoc'h, hor c'halon, hor speret,
Ennoc'h brema e lacomp on oll fizianç,
C'hui a garimp oll dreist bep tra bepret.



PROMESSA A FIDELITE DA ZOUE.

T O N : *Jadis un célèbre Empereur, etc.*

RED eo din er mission - man
Choas eur Mestr pelloc'h evid bepred:

Coupabl e vezin, ma n'er gran,
Pa vilit Doue beza choaset.

Pelloc'h eta e lavaran :

Deoc'h, va Doue, en em roan.

(bis.)

Da biou e dlean - me beza,
Me pec'her, pini oc'h eus crouet

Ha pini oc'h deut da veva

Gand ho substanc, ô tra caer meurbed. Pelloc'h eta, etc.

Inutilamant e redan,
Allas! noz - deiz varlerc'h ar bonheur;

Pell diouzoc'h ne remercan

Nemert vanite ha peb malheur. Pelloc'h eta, etc.

N'euz nemedoc'h, gouzout a ran,
Capabl d'am renta bepret eürus;

C'hui, c'hui epq'en a zeziran,

C'hui epq'en a servichin joaüs. Pelloc'h eta, etc.

Petra eo madoù an douar?

Nenbend a dalont e guirionez :

Nan, oll n'ho deus q'et ar pouar

D'am c'hontanti epad va buez. Pelloc'h eta, etc.

Possedi a ran va C'hrouer,
Ne c'houlennan q'et netra ouspen;
Peb mad terrien a zilezer
Pa bosseder ar mad souveren.

Pelloc'h eta, etc.

Fallout a ra deoc'h hor chalmi,
Ho poan a gollit, plijaduriou;
Hon desirou a dromplit e'hui,
Var ho lerc'h ne chom nemet daelou.

Pelloc'h eta, etc.

Pebez innoçanc, pebez joa
A zo en ho panq'et precius;
Din e roit certen ennâ
Mil gonsolation, va Jesus.

Pelloc'h eta, etc.

Bep heur ar bed a lavar din :
Va buguel, heullit va lezernou.
Bep heur dezan e respontin :
Trompler, me gasa da zeliçou.

Pelloc'h eta, etc.

Din e lavarit gand doucder :
Va buguel, red eo va servicha;
Piou benac zo va servicher
En deus eur blijadur ar vrassa.

Pelloc'h eta, etc.

Q'er bras eo ho mad - oberou
En andred eur pec'her eveldon,
Evit ho meuli, va Autrou,
Penaos en em guemeret ne ouzon.


Pelloc'h eta, etc.

Plijout a ra gueneoc'h goulén
Digueneime va c'halon dister ;
Er c'hemerit, mestr souveren,
Grit anezan un tron, un auter.

Pelloc'h eta, etc.

Va c'halon deoc'h a gonsacran,
Me a fell din ho carfe bepret !
Test ra vezo an donezon
En deus digueneoc'h - u recevet.

Pelloc'h eta, etc.



CONVERSION UN DANCERES.

TON : *Seigneur, Dieu de clémence, etc.*

ME veulo, ô va Doue!
Ho madelez brema,

Rac roët oc'h eus dime
 Eur c'hraç ar re gaëra.
 Adie, va merc'h, d'an dançou
 Oc'h eus din lavaret,
 Ha q'erq'ent, ô va Autrou!
 E meus oboisset.

Arauc ma zen d'an dançou,
 M'edo leun a furnez;
 Mæs brema en ebaton
 Hon leun a follentez;
 Did eta, danç milliguet,
 Gand joa e renonçan.
 Mil ha mil mallos d'ar bed
 Da viqu'en a roan.

Ia, guech - all me garie
 Ar vertus, va dever,
 Alies m'ho receve,
 Jesus, oc'h an auter;
 Brema, siouas evidon,
 Horrol evid ar vad
 En deus ato va c'halon:
 Pardonit din, va zad.

Guech - all gand calz a zouçder
 Oc'h va zud me zente,
 Ha guened va c'haracter
 An oll a azmire;
 Brema hon deut da veza
 Divergond bras meurbed,
 Bete ar gomz diveza
 Me a rezon bepred.

Guech - all modest me vige
 Em oll guiscamanchou;
 Ha james ne sortie
 Comz fall dioc'h va guinou;
 Brema hon deut da garet
 An oll vaniteou;
 Mez em eus en lavaret,
 Re libr hon em c'homzou.

Nan, guech - all na veljac'h q'et
 Scanvadurez ennon;

Me gavet eur plac'h parfet
 E peb occasion :
 Brema , plac'het va farrès,
 Clasq'it eur model - all,
 Rac me ro e guirionez
 Pell zo deoc'h oll squer fall.

Me zo zur en em gollet
 O vont d'an ebatou.
 Ha perac na vigen q'et?
 Ne veler en dançou
 Nemert tud yaouanq, siouas!
 Libertin, touerien,
 Ha pere a zo, allas!
 Liger ha scan a ben.

Me lavaro gand rezon :
 Ar zonnèr zo bépred
 Eur vocen hac eur poëzon
 D'ho daoni oll carguet ;
 Dre e zon, dre e vuzic
 Hor ped da vont gantan,
 Ar mezieur, a reuzudic,
 Da chom da dy Zatan.


En eur guir, oll tud yaouanq,
 Va c'hredit, en dançou,
 Nan, james netra ne vanq
 Evit coll eneou.

En ebatou ne zanter
 Nemert c'huez ar viçou,
 O c'hazad zo necesser
 Evit mont d'an evou.

Ar song eus a garantez,
 Va Doue em andred,
 A deu da douch a nevez
 Va c'halon gouliet ;
 Ar song e rancan mervel
 Hac e vezin barnet
 A ra dime dilezel
 An dançou milliguet.

Tud yaouanç, songit ivez
 E madelez Doue,

Hac er maro alies,
 Hac en eternite;
 Ar song eus a guemen-mâ,
 A lavar ar scritur,
 A ra d'ar pec'her crena
 Hac e douch a dra zur.
 Ra blijo d'ho madelez,
 O va Doue, bremâ
 Ober eur sell a druez
 Ouzomp, er barrès - mâ;
 D'an dud yaouanc inspirit
 An desir da garet
 Ho madelez infinit,
 Ha d'e meuli bepret.



PROMESSAOU AR VADIZIAND.

TON : *J'engageai ma promesse au baptême, etc.*

DRE c'hinou va faëron, va maërones,
 Me bromettas caret va Doue;
 Mæs hirio va-unan gand levenez
 E lavaran : me bromet ive. *(bis.)*

Me gred ta en un Doue tri ferson,
 Gand va goad, ma ve red, er sinfen;
 Q'emer a ran ar resolution
 Da veza ferm ato em c'hreden. *(bis.)*

Me a gred c'hoas en un Doue salver,
 A zo maro victim evidon;
 Da lesennou an Ilis, mam dener,
 M'en em zoumet a greis va c'halon. *(bis.)*

Er men-fond-man, e don c'hoas mailluret,
 Doue am choazas evid buguel :
 Un tad q'er tener m'am beuz offancet,
 Me a bromet en respeti guel. *(bis.)*

Renonç a ran da bompou ar bed-man,
 D'ar c'hic ha d'e oll follenteziou.

Dide, Satan, adie a lavaran,
 Evit biq'en adie da c'hœuvrou. (bis.)

Plijadur væan, sourcen a viçou:
 Re bell, siouas! e meuz da garet;
 Me renonç da tivertissamanchou,
 Doue epq'en a veulin bepret. (bis.)

Ia, ia, an aviel epq'en,
 Eus va spered, va c'homportamand,
 A vezo, en desped din, ar reglen;
 Clem, q'ic fragil, inutilamant. (bis.)

Va Doue, piou benac oc'h anavez
 A zant prest eo douç ho lezennou;
 Ne mezo mistr - all ebet em buez,
 Ne servichin nemedoc'h, Antrou. (bis.)

Var ho lerc'h eurussoc'h, ô va model!
 Eguet var lerc'h an oll rouanez;
 Me a gasa ar bed - man infidel,
 Douguet ho croas a fell din bemdez. (bis.)

An êe, evit eur momend a zouffranç
 Ar pris ma tle beza un devez;
 Chalmet eus un evelep recompanç,
 Me zouffro tout, ô va c'harantez! (bis.)

C'hui epq'en a fell din, ô va Doue!
 A ve va dezir, va flijadur;
 Neubeud eo hirvoudi evit an êe,
 Evidoc'h - u e rin a dra zur. (bis.)

En êe va bro, pa zeo guir e vèzoc'h
 Eus va madou ar preciussa;
 Me bromet hivisiq'en em gueloc'h
 Fidel ato deoc'h e peb tra. (bis.)

SANTIMANCHOU EUR BUGUEL

E Q'ICHEN AR MÈN-FOND, DEVEZ E COMMUNION.

TON : *Sellaouit gand joa, etc.*

EUR BUGUEL E-UNAN.

E DOT c'hoas da c'henel,
 Pa bec'has hon tad q'enta;

D'e Zoue infidel,
 E reas deomp perissa.
 Jesus o velet ze :
 O va zad q'er, emezan,
 Ra varvin evite,
 Ho zavetei a rancan.

AR VUGALE ASSAMBLÈS.

O devez solanel,
 Devez a joa evidomp !
 C'hui gar, Tad eternal,
 Calz pepini ac'hnomp.
 Memes an disterra
 E touez ar vugaligou
 A garit dreist peb tra ;
 A guemen-se omp testou.
 Gand e c'hoad precius
 En deus eta raparet
 An offanç q'er grevus
 Creat d'e dad dre ar pec'het.
 Lezet en deus gueneomp
 An dour eus ar vadiziant
 Da voalc'hi ac'hanomp,
 Miracl meurbed consolant.
 O devez solanel, etc.

Ia, dr'er vadiziand
 E zeo ennon effacet
 Ar pec'het affligeant,
 Originel eo hanvet.
 Getu me adare
 Buguel da Zoue rentet :
 Salo din, em bige
 Va c'haracter conservet.
 O devez solanel, etc.

E porched an ilis
 Va faëron, va maëronez
 Am prezantas gand feiz,
 Admirapla carantez !
 Evit eur c'hrouadur
 Ne alle c'hoas lavaret ;

Me fell din , a dra sur ,
 Beza eur C'hristen parfet.
 O devez , etc.

An ilis a zigor ,
 An oleo zø preparet.
 Bremaïc , va redemptor ,
 E vezin pare rentet.
 Ar c'homzou-man epq'en :
 Va buguel , me a padez ,
 A finis va anq'en
 Hac am c'harg a levenez.
 O devez , etc.

Ne vezo q'en evidon
 Nac ifern , na tourmanchou.
 Collet oc'h eus varnon
 Ho pouar , drouc-sperejou.
 Beza hon bet goalc'het
 En eur sourcen ar purra ,
 Miraculus meurbed ,
 Eur feuntun ar re gaëra.
 O devez , etc.

Va Doue , me voa caër
 Pa sortiis anizi !
 O eurussa amzër !
 Biq'en n'er goëlin muï.
 Astrou ar firmamand ,
 An heaul e-unan ive
 Ne dint q'et q'er brilland
 Evel ma edon neuze.
 O devez , etc.

An êe a zigoras ,
 An ifern a voë serret ;
 Ælez am c'hunduas
 D'ar mèn-fond-man benniguet ,
 C'hui ho poë plijadur ,
 Va Autrou , en devez-se ,
 E rei d'ho crouadur
 Ho craçou mad adare.
 O devez , etc.

Mæs trista songeson,
 Devez buan tremenet!
 Siouas, squizet e zon
 E caout un tad q'er parfet.
 Terri ho lesennou,
 Disprija ho madelez;
 Ah! brassa pec'hejou,
 Cetu petra ran bemdez.
 O devez, etc.

Va guervel aliès
 Ha sq'ei var boul va c'halon
 A reac'h gand carantez.
 Ha me, buguel diræson,
 A re scouarn vouzar,
 A zisprize ho mouez.
 E mon var an douar
 Evel pa vèn divadez.
 O devez, etc.

AR VUGALE ASSAMBLÈS.

Dirazoc'h, va Zalver,
 Omp deut oll da nevezi
 Ar promessaou caër
 Zo bet great evidomp-ni.
 Selaouit hor peden,
 Hon recevit adare.
 Ni vezo a viq'en
 Fidel deoc'h, ô va Doue:
 Ni renonc a nevez
 Da Zatan ha d'e œuvrou;
 Ni lavar en eur vouez,
 Gand joa, adie d'e bompou
 Ne heullimp q'en ar bed
 Nac e vaximou monden,
 Rac caos, siouas, int bet
 Eus hor buez dizordren.
 Promettomp assemblès,
 Promettomp d'an Eternel:
 Promettomp ep enchrès
 Cundui eur vuez santel.

Er prometti a reomp
 Beva gand perseveranc,
 Hirio a c'houlennomp,
 Va Doue, en ho toujanç.



AR PSALM SUPER FLUMINA BABYLONIS,

PE HUANADOU AN DUD FIDEL DA ZOUE, EN DRAOUNIEN-
 MAN A ZAELOU.

TON : *Va Doue leun a drugarez, etc.*

EXILET e Babylon, var bord e rivierou,
 Azezet oc'h hirvoudi, beuzet en hon daëlou;
 Pa deuomp oll da zonzal er gueur a Zion,
 Gand an anq'en, ar glac'har eo mantret hor c'halon.
 Ne chomp'ta gueneomp nemert daoulagad da voëla.
 Penaos en em rezolvi birviq'en da gana?

Evel-se e meump staguet hon oll instrumanchou
 En e c'hreiz oud an halec, var bord e rivierou.

Ar re a zalc'h ac'hanomp en esclavach cruel,
 A lavar deomp - ni c'hoas : savit ho mouez huel,
 Evit disq'i deomp ivez canticou caër ho pro :
 Canit, emezo, eta; attantif ni vezo.

Hac ar mistri barbar - ze ne eanont d'hor pedi
 Ha d'hor pedi adare da gommanç meuleudi
 Doue bras pobl Israël; ne vezit q'et diræson;
 Canit deomp unan benac a ganticou Sion.

Ho peden a zo vëan, ni respont gand daëlou,
 Penaos cana meuleudi, hon Doue, hon Autrou;
 E bro an estranjourien, ha pell dioc'h hon hini,
 Er vro - man na rin biq'en nemert huanadi.

Jerusalem, me promet laouen, evit ho cloar,
 Noc'h anconac'hain q'et jamæs var an douar :
 Rac ar sonch eus a Zion mar collan, va Doue,
 Va dourn deo en ho coler, dizec'hit ep dale.

Jerusalem va guir vro, va c'honsolation,
 Ra deuio va zeod selacet da staga out va staon,

Ma na vec'h e peb amzer objet va meuleudi,
M'ar earan eur vro benac muioc'h evidoc'h - c'hui,

Ma na rit hiviziq'en va joa principalla,
Douar santel gand Doue cherisset dreist peb tra;
C'hui vezo a dra certain dòn ato em speret;
Evit test e q'emeran an heaul benniguet.

Doue ar justic' memès, n'anconac'haît q'et
Bugale eur guer iffam, Edom e zeo hanvet.
Cetu ama, va Autrou, ar pezh a lavarent,
Deiz distruj Jerusalem, en eur vouez e crient.

Freuzit, freuzit, emezo, ar guezar a Zion,
E distrujit ep truez, hac ep compassion;
Lamit ar men divezad oud e fondamanchou,
Evit na vezo biq'en remerq'et e roudou.

Ha c'hui, merc'hed Babylon, pere a zo certain
Da berissa maleürus, ha da vervel souden;
Re eürus nep a ello ober deoc'h ar c'hollou
Oc'h eus - u great deomp - ni; preparit ho taëlou.

Re eürus nep a ello cregui 'n ho pugale,
Pa vezint o tena deoc'h, crenit, crenit neuze;
Evit dont da frigaça dezo oll ho fennou,
Ha d'ho zeuleur oc'h ar veïn, pe oc'h ar vogueriou.

CLEMOU ENEOU AR PURGATOR.

TON : *Au fond des brûlans abymes, etc.*

TAULET e creiz an abymou,
E c'hirvoudomp, e voëlomp;
Evit effaci hor c'hrimou
Pell dioc'h Doue e souffromp.

Allas ! allas !

Birviq'en, nan, nan, hon daëlou
Ne lasint un tan q'er bras.

Hor zoulagit en hor poaniou,
C'hristenien, bezit touchet
Dre ar guël eus hor supplicou;
Hon dilivrit, ni ho ped.

Allas ! allas !

An êe, ep ho sacrificou,
Da glem pell hor lezo e'hoas.

Eneou devot da Jesus,
C'hui a ell sur hon tenna
Dioc'h ar flammou-man divorus.
Deoc'h ne refuser netra.

Allas ! alas !

Eus eur feçon rigolius
Omp zreter ama, siouas !

Arretit brema ho coler,
O Doue, pardonit deomp !
Goad Jesus, ho map, hor Zalver,
A c'houlen graç evidomp.

Allas ! alas !

Ha possubl e ve, hor c'hrouer,
E trefac'h ac'hñomp goas ?

oo

AR SEIZ PEC'HET CAPITAL.

TON : *Oui, je crois, etc.*

Renonç a ran
Dide, ourgouill, pec'het Lucifer ;

Renonç a ran,

Dide adie a lavaran :

Te c'heus collet hon tadou q'enta,
Va c'holl a rafez ive brema.

Renonç a ran.

Renonç a ran

Dide, avariç, pec'het iffam ;

Renonç a ran,

Dide adie a lavaran :

Me a zispriz madou an douar

Evit mont gand Jesus d'e c'hloar.

Renonç a ran.

Renonç a ran

Dide, luxur, pec'het impudic ;

Renonç a ran,

Dide adie a lavaran :

Ervez Sant Paul, te en hon touez
Ne dlefez beza hanvet james :

Renonç a ran.

Renonç a ran

Dide, avi, pec'het detestabl;

Renonç a ran,

Dide adie a lavaran;

Rac evit da garet e rancfen

Detesti va nessa da viq'en :

Renonç a ran.

Renonç a ran

Dide, gourmandis, pec'het noazus;

Renonç a ran,

Dide adie a lavaran :

Var da lerc'h-te, siouas ! ne veler

Nemert clenved, poan e peb amzer.

Renonç a ran.

Renonç a ran

Dide, coler, pec'het milliguët;

Renonç a ran,

Dide adie a lavaran :

Te zo caus d'an ene da goeza

En dizurzou eus ar re vrassa.

Renonç a ran.

Renonç a ran

Dide, diegui, pec'het marvel;

Renonç a ran,

Dide adie a lavaran :

Te a zizenor an den ama,

Hac e zisprizout te a laca.

Renonç a ran.

Renonç a ran

Gand joa d'ar zeiz pec'het capital;

Renonç a ran,

Dezo adie a lavaran.

Eus ar pec'hejou int ar sourcen,

Ober a reont malheur eur C'hristen.

Renonç a ran.

AR GOMMUNION GENERAL

TON : *Venez , mon Dieu , etc.*

Deut, va Doue, deut 'ta, deut da rên em c'halon,
En em roït din er gommunion.

Va ene paour pell zo ho cortos, ô va Jesus!
Deut d'e mezur brema, gand ho substancé precius.
Deut, va Doue, etc.

C'hui epq'en, va Jesus, a ell ober va bonheur,
Disq'ennit em c'halon, grit dime eur seurt faveur.
Deut, va Doue, etc.

C'hui eo ar pastor mad, ar pastor dre excellancé,
O pet truez ouzin, ennoc'h e ma va fiziancé.
Deut, va Doue, etc.

C'hui eo ar medecin, ar medecin souveren,
Oud va gouliou sellit, ha finissit vá anq'en.
Deut, va Doue, etc.

Ia medecin oc'h, ha pastor ar bastoret,
C'hui pini a zo ama, en hostif santel cuzet.
Deut, va Doue, etc.

Ennoc'h me a esper, ô va Zalver benniguet!
Abalamour m'oc'h eus din ho craçou promettet.
Deut, va Doue, etc.

Me a meus ho caret, me ho caro da viq'en,
Me a vezo bépret fidel deoc'h ha d'ho lezen.
Deut, va Doue, etc.

E goëled va c'halon, va Jesus, brema lennit,
Eus e gueuz bras meurbet test er momend - ma bezit.
Deut, va Doue, etc.

Me zezir possedi redemptor ar bec'herrien,
Ar c'haro ne clasq q'et q'er c'hoantec dour eur sourcen.
Deut; va Doue, etc.

C'hoant a meus da bellaad, ô oan sacr, dioud ho panq'et,
Pa sonjan em buez, em pec'hejou bras meurbet.
Deut, va Doue, etc.

Me vel ar vesel sacr var an auter preparet,
Ar belec a brezant din an hostif consacret.
Deut, va Doue, etc.

ACTION A C'HRAÇ.

TON : *Bénissons à jamais*, etc.

MEULOMP Doue bep heur,
 Èn a ra hon oll bonheur. (*bis.*)

Meulit-èn, Ælez santel,
 Meulit e vajestez;
 Rentit d'e vadelez
 Mil meuleudi eternal.

Meulomp Doue bep heur,
 Èn a ra hon oll bonheur.

Hac èn zo un tad tener,
 Sourcius bras meurbet!
 Hor zouffr a ra bepret,
 En desped d'hon oll mizer.
 Meulomp, etc.

Oud eur pastor mad envel,
 Ep caout aon rac ar boan,
 Da bourçu ne ean
 Un danvad q'eaz infidel.
 Meulomp, etc.

Torret en deus va chaden
 Dre e nerz galloudus;
 E varo precius
 A finis va oll anquen.
 Meulomp, etc.

Va rentet en deus pare,
 Evel eur medecin;
 Evel eur mestr divin
 E vag, e tom va ene.
 Meulomp, etc.

Scuil a ra en abondanç
 E c'hraç bep heur varnon;
 Ha goëled va c'halon
 A choas evit demeuranç.
 Meulomp, etc.

Em plac meulit, peb mouez,
 Un Doue q'en tener;
 Din e teu da ober
 Bep deiz faveuriou nevez.
 Meulomp, etc.

E vadelez am zuport,
 E speret am c'helen,
 E c'henet am zurpren,
 E garantez am zransport.
 Meulomp, etc.

Va zreti ra gand douçder,
 Dre e c'hraç hon pare,
 Dre e vertuz hon cre;
 Caret hon gand va Zalver.
 Meulomp, etc.

Doue eo va c'harantez;
 En a so va zouten;
 Va oll vad souveren,
 Ha va gloar, ha va buez.
 Meulomp, etc.